

Charlez Rolland

Lanneanou, 1862 – Gwerliskin, 1940

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

D'am Henvreur Fañch Jaffrennou

Deiz e Eured gand an Dimezell Jannig An Touz
en Kerhaez, d'ar 7 a viz Genver 1908

Setu-ni dastumet er gêr a Gerhaez
'Vid enori daou zen 'barz ar Briadelez ;
Pebez lorh evidon, pebez stad em halon !
Gelloud 'n eun deiz ken kaer komz deoh deuz ma mignon.

N'eus ket pell, kenvroiz, ar yez a gomzom oll
'Oa war an tre, siwaz ! da voned da beurgoll :
Gallaoued anoazuz ha Bretoned direiz
A glaske kement tu 'vid diskar yez kaer Breiz ;

En peb leh 'oa taget, divennet d'ar bugel
Komz pelloh ar yez ker 'n-oa desket er havell ;
Beteg d'ar stumm, d'ar hiz 'reent brezel en kuz,
Ha den ne lare mann dirag ar stad euzuz !...

Daoust ha din da zantoud o krozal 'barz em hreiz
Tan ar gounnar 'eneb oll enebourien Vreiz,
Ma-unan, dihalloud, ne reen 'med hirvoudi
Kana kañvou ha klemm war eun doare ken kri'.

Ar yez paour dilezet 'vid deski koz galleg,
Kollet on frankizou o selaou tud lorheg,
'Oam o vond da goueza, gwasoh evid gwechall,
Ereet breh ha garr tre dindan treid ar Gall.

Mez kerkent nevezenti ! Diwar lein ar mene'
'Oe klevet o sevel eur vouez skiltruz ha gê !
Hag ar vouez-se douget war askell an avel
A lakaas da grena douar koz Breiz-Izel.

Touellet o selaou, kement a oa kousket
Eun tan nevez 'n o hreiz 'oe kerkent dihunet :
Dre-oll 'oa levenez, kaniri, goueliou braz !
Ha yez Vreiz saovetaet 'oa kreñvoh 'vid biskoaz !

Ar paotr stard a laoskas, dispont, ar vouez hlan-ze
Eo or mignon karet a eureujom hirie,
Ar barz brudet "Taldir" a rumm-tud Jaffrennou,
D'an hini¹ Breiziz oll 'dle rei o bennoziou.

Ya, kenvreur kaloneg, te 'peus greet 'vid ar Vro
'Pez ne gredas ober den all abaoe pell 'zo ;
Harpet stard he gwiriou, laret distag d'an oll
E oam eur bobl dispar n'aje biken da goll !

¹ D'an hini : Da b'hini, er skrid orin.

Diskouellet d’an estren ‘oa beo-mad an Arvor,
Kaset ar brud outi pell en tu all d’ar mor ;
Tostaet gouenn-dud Vreiz sklabezet dre ar bed,
Greet deom en em bokad ‘vel gwir vreudeur bepred.

Bet out du-hont o prezeg, en Keumri, en Breiz-Veur,
Laret sklêr da beb rumm ‘oam kerent ha breudeur,
Deut eun deuz eur ouenn-dud gallouduz, taer ha kreñv !
Ar muia kaloneg² a oa dindan an Neñv !...

Dre da gomzou nerzuz, an tan sakr en da greiz,
P’oa ken tommet ar gwad en kalon diou vro Vreiz,
M’o-deus greet eun emgleo en eur stag divarvel,
Ma vo ar peoh gante en despet pep brezel.

Goude ‘oe siellet eur seurt unvaniez,
‘Oas deut hep koll amzer amañ da Gerhaez,
En penn diou gelaouenn, anvet *Ar Bobl, Ar Vro*,
A zalh da genvroiz war devez tro-war-dro.

Dirag eur seurt dihun, hag eun heveleb lañs,
Enebourien Vreiziz, en Bro-Zaoz hag en Frañs,
‘Oa chomet mantret oll, sebezet, maro-mik,
Digor frank o genou hep kredoud lared grig !

Kaerroh, dre an distaol a gement-mañ goude
“L’Entente Cordiale“ a oa prestig sinet ive’
Ha ma ren an Emgleo ‘barz en pep tu d’ar mor,
Te ‘poa greet an distign da genta, barz Arvor !

Ken stropet p’oa an oll ma teus lakaet ar sell
En pevar horn ar bed war bro goant Breiz-Izel,
He-deus savet he fenn uheloh ‘vid biskoaz !
‘Vid divenn he gwiriou, koulz hirie ‘vel warhoaz.

‘Benn ober kemend-all ‘oa red kaoud penn, me ‘lar,
Eur poeller dreist muzur, eur hoantegez dispar !
Eur garantez ker glan evid da Vro vihan,
Da vraster an hini³ ‘teus poaniet heb ehan.

Greet out gand eun danvez a zo boull da gaved,
Ha redeg a ra puill ‘barz en da wazied.
Gwad ar wazed ‘zo bet a-dreuz an amzerio’
En em ouestlet a-bez evid divenn o Bro !

Unan out er postou a weler da beb oad ;
Ha gwad on barzed koz ‘dle bervi dre da wad !
Marzin, Gwenc’hlan, kalz all, ‘deus saillet o halon,
O klevet ‘ziah d’o bez da “Delenn dir“ o son.

Biskoaz den ne zougas eun ano muioh gwir⁴,
Na kaerroh ano Barz ‘vid da hini, Taldir ;
Rag war da dal breizad e luh ‘vel eun direnn,

² Ar muia kaloneg : galleg (gand Taldir ivez !) ar galoneka.

³ an hini : “pehini“ er skrid orin.

⁴ muioh gwir : galelg : gwirroh.

A dorro marteze ; mez 'vid plega... biken !

Moarvad nez da dal dir 'oas bremañ er bed all
En-tal Proux ha Luzel o tispenn Yann-ar-Gall,
Pa oas kouezet warnañ deuz kreh war da leurzi
Trouz al lamm 'oa klevet dreist ar mor en Keumri !

Evel deh, pa glevjom 'leuskes *Ar Bobl* war var :
Nag a gaskal⁵ em Breiz ! nag a bed en glahar !
Mez en-gortoz om oll az-po harp ha skoazell
Da zerhel war elum Tour-tan Bro Vreiz-Izel !

Da gement 'n-esus stourmet 'vid klask ar Wirionez
A zo bet greet⁶ dalhmad eur brezel didruez :
Na reom ket a van ; pep tra 'rank dond d'e dro
Hag a-raog, sonn ar penn, 'vid ar yez hag ar Vro !

Na pa gouezfe *Ar Bobl*, *Ar Vro* a zo aze c'hoaz,
Ha te 'chom sonn ez sa', startoh evid biskoaz !
N'eus forz penaoz 'vo kont, te 'rank rei da ziviz,
Birviken 'vi harzet da ober deuz da hiz.

Ganet war ar frankiz war lein menez Are,
En êr vad en Karnoed 'fell dit kaoud librente',
Da zistaga da zoñj war-eeun ha dishual ;
'N eur hoantaad en distro memez tra d'ar re all ;

Librentez da beb den, en pep stumm, en pep stad,
Gand urz da zislared pa ne gaver ket mad ;
Setu ar wir reolenn az-peus atao heuliet
Ha se 'lak ahanout braz dreist peb izelled !

Bewech hag en pep tra 'reer 'vid Breiz, te 'ziskouell
Out eun den digabestr hag eur spered uhel
Da biou⁷ den n'hell lared 'mañ o klask lorchajou,
Pa stign da oberou bep taol deuz da gomzou :

'Vel 'poa anvet *Ar Bobl* da gelaouenn garet
Out eet d'ar bobl izel 'leh az-peus dibabet
Eur plah fur da bried, 'zo kaer evel an de' !
Greet hervez da galon eur stag a garante'.

O rei da zorn d'eur plah gouest a beb madelez,
E tiskouelez 'fell dit chom war hent ar furnez ;
Rag ar furnez 'lar deom : Karantez 'leiz an dorn,
A zo kant kwech gwelloh 'vid madou 'leiz eur forn.

Ar varzed a blij deze kutuill ar bleun kaerra ;
Hag ar bleun kaer oute 'blij deze en em stoka !
Hag evel-se bep taol out skwer da genseurted,
Gand ar re⁸ da viken 'vi douget ha meulet !

Pebez enor ! plahig, deoh beza gonezet

⁵ nag a gaskal : nag a starlak.

⁶ A zo bet greet : ez eus bet greet

⁷ Da biou : galleg : D'an hini

⁸ ar re : "pere" er skrid orin.

Kalon eur barz leal, spered gwir, den brudet !
'Vo lorch ennañ d'e dro, tra vo war an douar,
Gand eun teñzor ken kaer, eur gened ken dispar !

Mil mennad deoh ho-taou war hent braz ar vuhez !
Peoh paduz, evrusted, en kreiz ho karantez ;
Bennoz Doue d'ho heuill, lañs deoh da genderhel
D'ober en pep feson enor da Vreiz-Izel !!!

Charlez Rolland, Gwerliskin.